

An divyezhegezh en ho kumun

Labour bet kaset da benn e kenlabour gant bodad yezh Ti ar Vro



I - AR BREZHONEG : UL LAÑS NEVEZ.....	2
A – Breizhiz a-du evit adperc’hennañ ar brezhoneg.....	3
B – Diorren an deskiñ brezhoneg.....	4
1) Ar c’helenn divyezhek.....	4
2) Stummañ an oadourien.....	4-5
C – Ar mediaoù : ur plas nevez evit ar brezhoneg.....	6
D – Ar brezhoneg er vuhez foran	7
E – Ur gennad ma vez krouet postoù-labour.....	8

II – UR POLITIKEREZH YEZHHEL EVIT HO KUMUN

A – Oberoù eeun hag efedus da gas.....	9
1) ar panellerezh divyezhek war an hentoù.....	9
2) Anvadur divyezhek ar savadurioù foran.....	9
3) Al lec’hioù dibar hag istorel.....	9
4) Adsevel ha gwareziñ an anvioù-lec’h orin.....	10
5) panellerezh an dafar-kêr.....	10
6) Ar plakennoù-straed.....	10
B – Pelec’h kavout un skoazell deknikel.....	11
C – An arc’hantaouiñ marc’had-mat evit ur politikerezh yezhel uhelek.....	12
1) Oberoù n’eo ket ret paeañ evito.....	12
2) Ur raktres terkañ yezhel hollek.....	12
D – Oberoù donoc’h evit ur politikerezh ledanoc’h.....	13
1) Er servijoù-kêr.....	13
2) E buhez ar gumun.....	13

I - AR BREZHONEG : UL LAÑS NEVEZ

Ent ofisiel e oa bet aotreet kelenn dre zibab ar brezhoneg er skolioù gant al lezenn Deixonne e 1951. Un araokadenn dister e oa met evit ar wezh kentañ e oa bet tizhet ur bazenn a bouez hag a ginnige ur sell disheñvel war ar brezhoneg. Siwazh dezhi ne voe ket trawalc'h evit diverkañ efedoù dekvloaziadoù a ziskred ma voe bannet ar brezhoneg eus ar gevredigezh. Penaos emañ kont hiziv an deiz, hanter-kant vloaz goude embannidigezh al lezenn-se ?

Nebeutoc'h-nebeutañ a vrezhonegerien a-vihanik ez eus ha koshoc'h-koshañ eo ar vrezhonegerien dre vras : 1999 tri brezhoneger diwar bevar a zo en tu all da 50 vloaz hag unan diwar zaou a zo en tu all da 65 bloaz (mammenn : Ebssa - Enklask : Étude de l'histoire familiale). Bep bloaz ez a être 10.000 ha 15.000 anezho da anaon, ha ma ne reer netra e c'hallfe an niver a vrezhonegerien digreskiñ dindan 100.000 komzer a-benn 2010. Hiziv eo eta e vo diazezet dazont ar brezhoneg.

Eüruzamant ez eus meur a elfenn vat a Iaka ac'hanomp da zerc'hel spi.

Tro-spered an dud, dreist-holl, he deus cheñchet ar muiañ war an tu mat. War-raok eo aet an darempredoù etre Breizhiz hag o yezh ha santet e vez ur gwir youl da adperc'hennañ ar brezhoneg. Kement-se a vez diskouezet-splann gant ar sontadegoù nevez war an danvez : ne fell ket da Vreizhiz ez afe o yezh da get.

Da vat ez a ar c'helenn divyezhek war ziorren : e 2005 e veze desket 10 397 bugel dre ar bedagogiezh digeriñ ha gwriziennañ-se ha kreskiñ a ra an niver a skolidi a dost 10 bep bloaz.


Hiziv en deus ar brezhoneg ur gwir dalvoudegezh e bed ar mediaoù. Ha ne dalvez ket kement-se ez eus ur youl d'ober gant ar brezhoneg er vuhez foran ? Dedennet eo bed an ekonomiezh gant an dalvoudegezh-se ivez rak er bed a-bezh ez eus tu da sevel takadoù ekonomikel a dalvez d'ur gwir varc'had dre implijout « ar yezhoù bihan », evel ma vez graet diouto. Da vat eo spletus mestroniañ ar brezhoneg bremañ

Erfin, war a seblant, e vez implijet muioc'h-muiañ ar brezhoneg e metoù ar strollegezhioù lec'hel ivez ; hag ur gwir c'halloud divizout o deus war an dachenn-se.

Se zo kaoz eo a bouez-kenañ evit Breizh Iakaat da dalvezout ar pezh o defe c'hoant re all da gaout : ur yezh dibar.

A- BREIZHIZ A-DU EVIT ADPEC’HENNAÑ AR BREZHONEG

E miz Ebrel 1997, diwar intrudu ar gazetenn Le Télégramme ha France 3, e oa bet kaset ur sontadeg da benn gant an ensavadur sondañ T.M.O. war ar pezh a soñj Breizhiz war ar brezhoneg hag he dazont.




Diouzh an disoc'hoù e kar Breizhiz o yezh. 88 anezho a soñj dezho eo ret saveteiñ ar brezhoneg (96 % eus ar re yaouank dindan 20 vloaz) hag 80% anezho a sav a-du evit ma vefe kelennet er skol. E 2001 92% o deus c'hoant e vefe miret ar brezhoneg (mammenn : sontadeg kaset da benn e 2001 war Breizh a-bezh gant TMO evit Buhez ha Frañs 3).

Kresket-kaer eo ar sifroù-se e-keñver an hevelep sontadeg T.M.O. e 1991. Diskouez a ra splann eo mennetoc'h-mennetañ Breizhiz da saveteiñ o yezh.

B- DIORREN AN DESKIÑ BREZHONEG

1- AR C'HELENN DIVYEZHKEK

Ar grafik amañ da heul a ziskouez kresk an niver a skolidi skoliataet en holl hentadoù divyezhek (Diwan, publik, prevez).



War ziorren-krenn emañ ar c'heleñn divyezhek ha dre se ez eo pouezus-tre roll ar c'humunioù war an dachenn-se.

Gant ar C'huzul-rannvro ez eus bet Iakaet da bal tizhout 20 000 skoliad a-benn 2010, pezh a dalvez eo ret d'ar Stad Iakaet ur gwir bolitikerezh e plas evit stummañ kelennerien. A-drugarez da se e vefe krouet ur 500 post-labour bennak e Breizh.

2- STUMMAN AN OADOURIEN

Un elfenn all a zo da gemer e kont pa gomzer eus diorren an deskiñ brezhoneg : stummadur an oadourien.

Meur a zoare a zo da se. An hini kentañ eo ar c'hentelioù evit an oadourien roet dezho gant ar c'hevredigezhioù, e stern un dudi. War an dachenn-se eo aet an niver a studierien war greskiñ-kaer abaoe 5 bloaz (5000 den e 2004-2005). E-keit-se e vez kinniget muioc'h-mui a gentelioù un tamm pep lec'h e Breizh, eus Gwitalmeze da Glison.

Un eil doare a grog da ziorren ivez, hini ar stummañ er metoù micherel. Da skouer, un nebeud embregerezhioù pe strollegezhioù lec'hel a ginnig heuliañ kentelioù bep sizhun, pe ober stajoù brezhoneg (ti-kêr an Oriant, Pondi, Karaez-Plougêr, Douarnenez, Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, Kambr kenwerzh granterezh Kerne, Kerne élagage, Ouest-France...). Ar c'horpidi a vez stummet a-youl-gaer.

C- AR MEDIAOÙ, UR PLAS NEVEZ EVIT AR BREZHONEG

Bez' emañ gennad kleweled Breizh war ziorren-kaer er mare-mañ ha bremañ e vez roet ur plas ledanoc'h d'ar brezhoneg ennañ. E 1998, da skouer, e oa bet digoret ur skingomz nevez e Kerne, benveg dibar dre ma ne rae nemet gant ar brezhoneg evit kehentiñ : Radio Kerne. Staliet eo e Ploneiz ha goprañ a ra pemp den. Ar produiñ abadennoù hag al labour melestradurel a vez graet war o zro gant ur pemzek den a-youl-vat bennak. Preder Radio

Kerne eo taolenniñ ar vuhez pemdeziek en ur glask skoulmañ liammoù être ar vrezhonegerien gozh hag ar re yaouankoc'h.

E Breizh ez eus pevar skingomz kevredigezhel a ra gant ar brezhoneg evel yezh kehentiñ : Radio Bro Gwened a skign e kornôg ar Mor-Bihan. Radio Kreiz Breizh e Kreiz-Breizh, Arvorig F.M. e Bro-Leon ha Radio Kerne e Kerne. Abaoe nebeut amzer e labouront dre rouedad.

Abaoe un nebeud bloavezhioù en deus ar servij publik diorroet plas ar brezhoneg en e abadennoù programmet war ar skinwel ivez a-drugarez da skoazell Kuzul-rannvro Breizh.

D - AR BREZHONEG ER VUHEZ FORAN

Abae ur pemzek vioaz bennak o deus kroget strollegezhioù lec'hel niverus d'ober gant ur politikerezh nevez a-du gant ar brezhoneg. Evel-se eo deuet ar brezhoneg war wel er vuhez foran.

War hentoù departamant Aodoù-an-Arvor e oa bet staliet ar pannelloù henchañ divyezhek kentañ e-kreiz ar bloavezhioù 80. Met an aveadurioù-se a oa bet Iakaet e kornôg an departamant hepken.

E 1990 en doa Kuzul-departamant Penn-ar-Bed divizet staliañ pannelloù divyezhek e toull ar c'hêrioù evit kregiñ ganti, a-raok ober war-dro an holl ahelioù da vodernaat, hag an holl banelloù a feur ma veze Iakaet re nevez e plas ar re gozh.

E 2005 e oa bet divizet goude votadeg a-unvouezh dilennidi Kuzul-departamant ar Mor-Bihan ober kemend-all.

Muioc'h-mui a gêrioù hag a gumunioù war ar maez a zibab ober gant ur panellerezh divyezhek. En o zouez emañ Brest, Karaez, Landerne, Lannarstêr, an Oriant, Montroulez, Plougerne, Pondi, Sant-Hern, Speied ha Kemper.

E- UR GENNAD MA VEZ KROUET POSTOÙ-LABOUR

A-drugarez d'al laÑs nevez-se e vez anavezet hag, en ur mod, reizhet plas ar brezhoneg. Mat eo resisaat ivez e vez krouet postoù-labour gant ar brezhoneg bremañ.

Evel-just e soñjer diouzhtu e gennad ar c'heleñn. Koulskoude ne vez ket atav anavezet-mat e ezhommoù. An ezhommoù a zo bet brasjedet a 500 post kelenner evit ar pemp bloaz o tont, en ur zerc'hel kont eus emdroadur an niver a skoiidi er skolioù kentañ derez hag eil derez. Met kement-mañ ne ra anv ebet eus ur skourr war ziorren-krenn ha war vicherelaat-mat : hini ar « c'hentelioù-noz » (pe kentelioù evit an oadourien) hag ar stummadur micherel. War un dro eo ret deomp menegiñ an holl implijidi «nann-kelenner » a labour er skolioù : evezhierien, koskor ATOS, animatourien,...

War ziorren-kaer emañ bed an embann hag an treiñ, liammet-tre ouzh bed ar c'heleñn. Gant an tiez-embann e vez tutaet grafourien dre urzhiataer, yezhoniourien, troerien, empenterien. Aliesik e vez goulennet diganto komz brezhoneg.

Implijet e vez ar brezhoneg er mediaoù ivez. Abaoe un dek vloaz bennak ez eus muioc'h-mui a skingomzoù kevredigezhel e Breizh. Berzh a ra bed ar c'hleweled ivez, dre an eilmouezhiañ da skouer.

A-hend-all eo ret kaozeal brezhoneg e servijoù-nes zo ha dreist-holl gant ar re gozh. Da skouer e tiez ar retredidi, en ospitalioù hag e servijoù ar gozhidi ez eus muioc'h-mui ezhomm da gaout tud evit kaozeal brezhoneg.

E berr gomzoù e c'haller priziañ an ezhommoù, a-benn ar pemp bloaz o tont, da viliadoù a gelennerien, a droerien, a animatourien (er skingomzoù, er skinwel, hag ivez war ar Genrouedad, er skolioù, er c'hreizenoù dudi, en ekomirdioù, e bed ar c'hevredigezhioù), a gazetennerien (gwask. radio, télé), a gomedianed (doublañ ha krouiñ). Hep ankouaat an holl vicherioù liammet outo : sekretourezed-merañ, kontourien, stlennnerien, kameraourien, aozerien filmoù a vo ret dezho mestroniañ ar yezh.

Erfin, dreist ar micherioù-se, en deus ar brezhoneg ur roll a-bouez a-fet skeudenn. Adperc'hennañ hor yezh a dalvez omp asur a-walc'h hag hon eus fiziañs en dazont. Hiziv, tra m'emañ ar vevezerien o klas traoù gwirion e vefe mat ez afe ar skeudennoù eus Breizh implijet bremañ en tu all d'ar folkloraj. Enframmanñ ar brezhoneg penn-da-benn en ekonomiezh a dalvez da gadarnaat un identelezh kreñv ha gwirion, un dae evit ar XXIañ kantved.

II - UR POLITIKEREZH YEZH EVIT HO KUMUN

A - OBEROÙ EEUN HAG EFEDUS DA GAS

AN DIVYEZHEGEZH : UR REOLENN GINNIG HOLLEK

A-benn kinnig an div yezh war ar mêmes troad ez eo mat o skrivañ en hevelep mod :

- memes font
- memes arouezennoù
- memes doare kinnig

1- AR PANELLEREZH DIVYEZHEK WAR AN HENTOÙ

Da gentañ-holl eo deuet an divyezhegezh war wel er vuhez foran a-drugarez d'ar pannelloù-hent. A bouez-kenañ eo diorren ar gennad-se peogwir e Iaka an holl dud e darempred gant ar brezhoneg. Sikour a ra da reiñ kred en-dro d'ar brezhoneg koulz hag un dalvoudegezh sokial ret-holl evit saveteiñ ar yezh hag he diorren.

Ur politikerezh a-du gant ur panellerezh divyezhek war an hentoù a c'hoarvez eus :

1/ pannelloù-hent ar savadurioù foran, evel an ti-kêr, ar skolioù, an aveadurioù sokiosevadurel, ar stad, an takadoù obererezh, an embregerzhioù...

2/ ar pannelloù-henchañ war an hentoù-kumun.

3/ ar pannelloù-henchañ war an hentoù-departamant hag an hentoù broadel.

2- ANVADUR DIVYEZHEK AR SAVADURIOÙ FORAN

Er mêmes kenver e tiskouez anvadur divyezhek ar savadurioù-kumun foran bezañ poellek-tre. Klotañ a ra brav gant ar pannelloù-henchañ (ti-kêr, skol, sal liezimplied, mirdi...). An hevelep tra eo evit ar pannelloù-henchañ stumm ur bir dezho hag ar pannelloù-emlec'hiañ divyezhek e-barzh ar savadurioù. Ar panellerezh-se a ro ur bersonelezh hag un identelezh d'ar c'humunioù a implij anezhañ. Ar skouer aroueziusañ eo hini Speied.

3- AL LEC'HIOÙ DIBAR HAG ISTOREL

Un dalvoudegezh pedagogel koulz ha touristel a zo d'ar panellerezh ha d'ar pannelloù-henchañ el lec'hioù dibar ha/pe istorel. Tu a ro da dud ar vro da adperc'hennañ o amzer-dremenet voutin. Da skouer : kêr Gemper. Dre staliañ pannelloù-henchañ en diskouezadegoù. ha pa vefe evit ur mare hepken, ha diwar-benn kement danvez zo, e c'haller reiñ ur plas d'ar brezhoneg e buhez kêr.

4- ADSEVEL HA GWAREZIN AN ANVIOÙ-LEC'H ORIN

Er c'humunioù, war ar maez dreist-holl, e vez kavet ul lec'hanvadurezh pinvidik-tre, na vez ket taolet trawalc'h a bled outi. Pouezus eo Iakaat anezho da dalvezout eta en ur wareziñ anezho hag en ur Iakaat o skritur da genglotañ.

5- PANELLEREZH AN DAFAR-KER

E pep kumun e vez implijet dafar (kirri, kirri-marc'hadourezh, poubellennoù...) warnañ anv ar gumun pe anv unan eus e servijoù. Sed aze un dachenn ma c'hall an divyezhegezh bezañ Iakaet e plas aes a-walc'h.

6- AR PLAKENNOÙ-STRAED

Mat e vefe prederian war staliadur plakennoù-straed e brezhoneg evit Iakaat an hollbanelloù-kumun da genglotañ.

B - PELEC'H KAVOUT UR SKOAZELL DEKNIKEL ?

An ezhomm da gaout ur framm gouest da ginnig barregezhioù teknikel d'an dilennidi a fell dezho diorren ar brezhoneg en deus Iakaet Kuzul-rannvro Breizh da grouiñ Ofis ar Brezhoneg.

Krouet e oa bet an aozadur-se e miz Mae 1999. Kresket-kaer en doa, pezh a ziskouez splann pegen

pouezus eo an ezhommoù war an dachenn-se. E fin ar bloaz 2005 e oa gopret 20 den gant an Ofis ; staliet eo e Karaez, Roazhon, Naoned ha Plañvour. Ur gefridi a servij foran en deus an Ofis e Breizh a-bezh. Da lavaret eo e c'hall an holl zilennidi kavout ur respont d'o goulennoù en ur vont e darempred gant unan eus 5 servij an Ofis (Glad Yezhel, Termenadurezh, Treiñ, Arsellva ar Brezhoneg hag Ajañs Diorren).

Servij ar Glad Yezhel, dre e labour dastum, en deus krouet un diaz lec'hanvadurezh. Gallout a ra studiañ an holl pe un darn eus anvioù-lec'h ur gumun diwar c'houlenn kêr, evel m'eo bet graet e Karaez pe e Rostrenenn.

Gant Servij an Dermenadurezh (Termbret) e vez kinniget termenoù nevez evit ma c'hallfe ar brezhoneg klotañ gant emdroadurioù ar vuhez a-vremañ ha gounit holl dachennoù ar vuhez sokial. Pep dilennad, c'hoant gantañ ma vefe gwelet pe implijet ar brezhoneg en ur servij. ha pa vefe teknikel-kenañ, a c'hall mont e darempred gant Termbret. Da skouer en doa Ofis ar Brezhoneg labouret war panellerezh servij radiologiezh ospital Kerne Kemper.

Erfin e vo tu deoc'h da respont d'an ezhommoù treiñ padus pe get gant servij trein Ofis ar Brezhoneg.

Daoust d'an Ofis bezañ un aozadur yaouank c'hoazh e tiaz ez hemañ war ur skiant-prenet pemzek vloaz dre m'eo hêr Servij ar Brezhoneg. Enskrivet eo e arc'hantaouiñ e stern ar gevrat-steuñv Stad-Rannvro, pezh a dalvez d'un arouez fiziañs el labour a vez kaset da benn gantañ war dachenn ar politikerezh yezhel. Tu a zo d'an ensavadurioù a fell dezho da sinañ ur gevrat-kefridi gant an Ofis.

C- UN ARC'HANTAOUIN MARC'HAD-MAT EVIT UR POLITIKEREZH YEZH EL UHELEK

1 - OBEROÙ N'EO KET RET PAEAÑ EVITO

Evit oberoù zo n'eus ket ezhomm da zispign arc'hant. Menegomp pep tra a denn da implij ar yezh dre gomz :

- 1 / Lidoù ofisiel
- 2 / Euredoù
- 3 / Prezennoù...

En degouezh-se e c'hall an divyezhegezh bezañ Iakaet e plas ma oar unan eus an dilennidi-gêr kaozeal brezhoneg. Heñvel-mik eo evit broudañ ar genwerzhourien pe ar c'hevredigezhioù.

Ne vez Iakaet seurt oberoù da dalvezout nemet dre youl ar bolitikourien. Se a zo boazioù da gemer tamm-ha-tamm evit ma teufe an divyezhegezh da vezañ naturel ha ma vefe enframmet e buhez ar geoded.

2- UR RAKTRES TERKAÑ YEZH EL HOLLEK

En ledanoc'h e kinnigomp deoc'h enframmanñ an oberoù-se a-du gant ar brezhoneg er vuhez foran, en ur raktres hollek, poellek, steuñvet ha gant ur budjed hag a vo Iakaet da dalvezout a dermen etre.

En ur sinañ ur gevrat-kefridi liesvloaziek gant Ofis ar Brezhoneg war labourioù treiñ, alioù, diagnostikoù pe stummadurioù e teuoc'h da vezañ kumun / kêr keveler eus an Ofis. Dre an emglev a vo skoulmet e vo kinniget deoc'h kas labourioù treiñ da benn, goude bezañ dibabet un treziad, e-pad padelezh an emglev.

Gant Kuzul-rannvro Breizh e vez kinniget skoaziadoù d'ar c'humunioù o deus dibabet ober gant an divyezhegezh er vuhez foran. Evit tennañ gounid eus ar skoaziadoù-se ez eo ret kinnig un teuliad ennañ munodoù ho raktres terkañ yezhel, o gant ur steuñv hag ur budjed evit ho holl oberoù. Gallout a rafemp menegiñ skouer kêr Bondi : arc'hantaouet e oa bet 50 eus he fanelloù divyezhek gant ar C'huzul-rannvro. A-drugarez d'ar programm terkañ-se ez eus tu da lodennañ an arc'hant postet war meur a vloavezh, ha war un dro da zigreskiñ ar c'houst evit ar gumuniez.

Ouzh ar C'huzul-departamant eo stag mererezh ar reizhiad pannelloù divyezhek staliet war an hentoù- departamant treuzet ho kumun ganto. Deoc'h-c'hwi eo eta da c'houlenn titouroù, evel maer, digant servijoù ar C'huzul-departamant.

D- OBEROÙ DONOC'H EVIT UR POLITIKEREZH LEDANOCH

Er c'hraf I hon eus kinniget un nebeud-tre a oberoù eeun da gas e stern ur politikerezh yezhel efedus.

Koulskoude e c'hall ar brezhoneg gounit tachennoù all e buhez ho gumun, pe ho kêr. Peurliesañ e vez aes-tre lakaat an oberoù-se da dalvezout ha ne goustont ket ker. Sed amañ da heul eta un nebeud skouerioù kinnigoù :

1 - ER SERVIJOÙ-KÊR

A) Lakaat brezhoneg ent sistematik e kannadig an ti-kêr dre embann ur pennad-skrid (pe meur a hini) e brezhoneg, pe dre embann ur c'hannadig divyezhek.

B) Diorren an divyezhegezh en dielloù ofisiel (talbennoù al lizhiri, ardamezioù, kendivizadoù, lizhiri skouer...).

C) Ober e doare ma vo brezhonegerien er servijoù degemer hag en reiñ da c'houzout en un doare sklaer.

D) Aesaat an ober gant ar brezhoneg e pep degouezh foran, dre gomz (prezegennoù, lid an eured, lidoù ofisiel...).

E) Kinnig deskiñ brezhoneg d'an implijidi, evel stummadur dibaouez. Broudañ implijidi ar gumun da heuliañ ar stummadur-se. Deskiñ brezhoneg pe gwellaat o live yezh a c'hall ober an dilennidi ivez.

2- E BUHEZ AR GUMUN

A) Aesaat diazebidigezh skolioù pe klasoù divyezhek pe o c'hrenvaat ma'z eus anezho c'hoazh :

-Skolioù Diwan (soubidiyezh)

-Skolioù publik pe brevez (div yezh par-ouzh-par)

B) Broudañ an holl genwerzhourien d'ober muoc'h gant an div yezh ; dreist-holl evit ar pezh a sell ouzh an darempred gant ar glianted, dre skrid (panelloù, bruderezh, kartennoù-bizit...) evel dre gomz.

C) Broudañ an holl gevredigezhioù d'ober muioc'h gant ar brezhoneg.

D) Lakaat levrioù, e brezhoneg kenkoulz hag e galleg, o tennañ da sevenadur Breizh, d'an Istor, d'al lennegezh, d'ar yezh e kreizennoù-teuliaouiñ ar skolioù hag al levraouegoù.

E) Ober a seurt ma vo atav divyezhek ar pezh a vez aozet evit ar re yaouank, rein lañs da vagourioù brezhonek, kizidikaat ar c'hluhoù sport d'ar brezhoneg...